



BREST, PORZ-MOR DISPAR !

*Son nevez savet gant « Eostig Kreisker » deuz Kastel-Paol
ha kanet gant Glaoda Coat, e genvroad
war don : O Breiz-Izel, o kaera bro !*



I

E Breiz-Izel. kement korn bro (*bis*)
Gant levez, me gano, lon le no, lon le no,
[lon la!
Gant levez me gano.

II

Me da gar, Brest, porz-mor dispar,
Difennour braz hon Douar.

III

Me gar ive, da Vartoloded,
Tud seder ha kaloneg.

IV

Wardro « Fautras », da soudarded
O vouse'hoarzin vez gwelet.

V

En « Arsenal » da vicherourien
N'eur labourat zo laouen.

VI

Diwar ar Pount Bras. pebeuz gwel
Dre gant. da listri-brezel. (1)

VII

E Santez-Anna ar Porzig
Brao eo ober eun droïg.

VIII

Barz e Kraon, er gourenezen (2)
Na pegen brao eo pourmen.

IX

Pa daolan eur zell war Plougastell
Na kaer ar Pount en dremwell. (3)

X

Warzu Konk-Leon, (4) kit eun dervez
Hag o pezo levez.

XI

E Ouessant, pebez dudi
Gwelet ar mor o c'hoari.

XII

Kaeroc'h korn-bro war an douar
M'euz ket kavet, m'hel lavar.

Fanch STÉPHAN.

Geriou diez : (1) *listri-brezel*, bâtiments de guerre — (2) *gourenezen*, presqu'île
(3) *en dremwell*, à l'horizon — (4) *Konk-Leon*, Le Conquet.

Reproduction interdite.

